

Pa gouezhas ar stered àr an douar...

Get Daniel Carré



Eh an da lâret deoc'h istor Margrit, ur plac'h seitek pe triwec'h vlez hag a oa chomet en hec'h-unan goude marv he mamm hag he zad.

N'he doa na breur na c'hoar ; na kerent all tost dezhi. Gwashoc'h c'hoazh : n'he doa blank ebet dirazi, rak he zud n'o devoa netra en tu all d'ar pezh a oa àr o c'hein, ha get ar pezhig-se e oant bet kaset d'an douar. Setu e tivizas an emzivadez kuitaat ar vro.

Gwiskañ a reas an dilhad a oa chomet geti : ur boned gloan, ur vrozha kotoñs da zougen àr un hiviz, ur vantell gozh bet d'he mamm, ha rummad galchoù he zad. Muioc'h ne oa ket. Kemer a reas c'hoazh un tamm bara a chome en ti, ha kuit.

Monet a rae hep gouiet forzh-kaer da be tu en em dreiñ. Ar gouiañv e oa, yen-sklasus an amzer.

En ur arriv get ur pont e reas he soñj ober un ehan aze, amzer da zebriñ he bara. N'he doa ket c'hoazh diskennet ar begad kentañ ma avizas un den kozh tamolodet e korn ar c'hleuz, en tu all d'an hent.

— Demat deoc'h, ma den mat ! eme Vargrit. N'eo ket gwall gaer bale.

— Ah, nann 'vat, merc'hig baour. Ar wirionez eo a lârit aze. Met... bara zo geneoc'h, doc'h ma welan. M'ho pehe ar vadelezh da reiñ din un tamm anezhañ. Daou zevezh 'zo n'em eus debret begad ebet.

— Ya 'vat, ma den mat ! Me am eus debret lein kent diblas. Moaian 'zo din paseiñ. Dalit !

— Trugarez, merc'hig ! eme an den kozh en ur dostaat, c'hoantek. N'hellan ket ho paeiñ, met kement-mañ a vo dleet deoc'h emberr en-dro, sur.

Ha eñ da bellaat en ur chaokiñ e vara.

Margrit a zalc'has ivez. Un tammig pelloc'h en em gavas get ur vaouez kozh.

— Oc'ho ! , eme an hini gozh. Na bravaet ar boned gloan a zo geneoc'h àr ho penn, merc'hig ! Me, kement a anoued am eus d'am fenn ma n'hellan ket mui harz. Oc'ho !

— Dalit, moereb ! eme Vargrit. Gwiskit ma boned. Kaeroc'h e vo d'ho penn.

— Trugarez, merc'hig ! eme an hini gozh en ur dostaat. N'hellan ket ho paeiñ, met kement-mañ a vo dleet deoc'h emberr en-dro, sur.

Un tammig pelloc'h c'hoazh e arrivas Margrit get ur vaouezig arall, dister, fall wisket. E oa é tastum tammigoù koad sec'h, briñsad ; danvez da werzhiñ da dud arall d'alum an tan.

— A, merc'hig baour ! eme-hi. Na yen eo 'velkent ! Toull-didoull ma zammoù dilhad ha n'hellan paraat an avel. N'on ket evit harz pelloc'h.

— Dalit, maouezig vihan ! eme Vargrit. Setu ma mantell. C'hoazh emañ ma brozhig àr ma c'hein.

— Trugarez, merc'hig vat ! Mil trugarez ! N'hellan ket ho paeiñ, met kement-mañ a vo dleet deoc'h emberr en-dro, sur.

Hag ar vaouezig, gwisket ar vantell dezhi, da zastum briñsad sec'h par ma c'helle.

Bremañ, p'he doa roet he boned hag he mantell, e sante Margrit an anoued é krog donoc'h enni.

'Vel ma tostae ar goubañvezh-noz e rankontras ur plac'h arall é tonet a-benn dezhi àr an hent. Ken fall wisket e oa-hi ivez ma krene evel un delienn en avel. Ha Margrit da deurel he brozh kotoñs ha d'he gwiskiñ d'ar plac'hig hep gortoz pelloc'h.

— O ! eme houmañ. Roiñ a rit ho prozh din !... Trugarez ! Mil trugarez !... N'hellan ket ho paeiñ, met kement-mañ a vo dleet deoc'h emberr en-dro, sur ha sur.

Ha Margrit da vonet atav. Kroget e oa an anoued bras enni pa ne oa ken àr he c'hein nemet he hivizig dister.

Un tammig pellicoc'h, en em gavas dirak ul lennad dour. Skornet-mat e oa, kalet an troc'had kler àrnezh. Met Margrit a dreuzas aes abalamour d'ar galochoù a oa en he zreid.

Pa arrivas en tu-all e kavas ur c'hrennbaotr hag a zamante, skoachet doc'h troad un dervenn vras.

— Aioù ! Aioù ! Setu-me dalc'het amañ. Botoù ebet em zreid, ha monet diarc'hen àr ar c'hler ne fizian ket. Ha lâret emañ ret din monet d'an tu all da glask ar medisinour. Mamm 'zo du-mañ é vervel àr he gwele. Penaos ober ? Penaos ober ?

— Dal ! eme Vargrit. Kroget e oa da zilasiñ he botoù. Dal ! Gwiskit ma galochoù ha hastit buan monet. Gras d'ho mamm da sevel yac'h ag he gwele.

— O, trugarez, plac'h yaouank ! eme ar paotr en ur wiskiñ ar galochoù. Trugarez deoc'h evit ho madelezh. N'hellan ket ho paeiñ, met kement-mañ a vo dleet deoc'h emberr en-dro, m'hen tou.

Hag e kemeras e lañs àr al lenn kleret.

Daet e oa an noz teñval. Margrit en em gavas en hec'h unan-gaer hag e komprenas en un taol e pe stad truezus e oa arriv. Ne chome geti ken nemet he hivizig skañv d'en em zifenn doc'h an anoued.

Sevel a reas he selloù trema an oabl. Spis ha splann e oa. Ar stered a lugerne ken brav, uhel doc'h ar volz zu.

Hag, en un taol, e voent bet gwelet doc'h en em zistag a-zoc'h bolz an

neñv hag é tiskenn, é tiskenn dousik, dousik betek an douar ; ‘vel fulennoù tan achapet a dantad an oaled.

Ha Margrit, treuzet tuchant get an anoued, en em santas aes en un taol. Gwisket en em gavas en-dro just evel ma oa en ur guitaat ar gêr. Penaos burzhud !... Hag, en-dro dezhi, àr an douar tro-ha-tro, doc’h he zreid ha pelloc’h, e oa kantadoù ha kantadoù a stered é lugerniñ dezhi... Diskennet e oant daveti àr an douar...

Ar plac’h a gemeras unan en he dorn, hag e teuas da vout ur mell pezh aour. Ha seul steredenn dastumet evel-se a reas ar mem tra.

Pa voe leun he sakodoù a bezhioù aour en em lakaas Margrit da vale pelloc’h. Er gêr gentañ treuzet e kavas aes bod ha boued, evel ma jaoj d’an dud o devez argant da baeiñ.

Doc’h ar pezh am eus klevet lâret e roas he demeurañs eno goude. James ne ankouaas e oa bet en diover, hi ivez. Ha trawalc’h e oa skeiñ àr he dor evit bout sikouret geti.

Achiv ma sorbienn ; muioc’h ne ouian ken.

• • •

Evit selaou doc’h an enrolladenn, kit àr www.tidouaralre.com